

# DIGEMERIT, O JEZUZ

Komzou : Job an Irien

Muzik : Kantikou Kemper ha Leon n°14 bis

*♩ ≈ 85*

1. Di - ge - me - rit, o Je - zuz, an deiz gand e ge - ned  
 2. War heñ - chou an A - vi - el, e sao an dén koue - zet;  
 3. Ho sklê - ri - jenn a za - vo war gou - li - ou an naon,

1. Ho ka - lon ma - de - le - zuz a gin - nig deom ar béd.  
 2. Tomm - der ho kom - zou san - tel a ba - re ar c'hleñ - ved.  
 3. He zomm - der a ba - re - o ar re baour a ga - lon.

1. Gan - (n)eoc'h e tou - gim gwel - loc'h skuiz - der on la - bou - riou,  
 2. Grit deom fran - kaad or c'ha - lon da zi - ge - mer ar béd,  
 3. Ho kroaz a jo - mo san - ket en or bu - ez be - préd:

1. Gan - (n)eoc'h e ka - rim don - noc'h ho pu - ga - le was - ket,  
 2. Ha tos - taad ouz ar paour - kêz hag an dén dis - pri - zet,  
 3. Euz ho pu - ez kin - ni - get e ti - ve - ro an deiz,

1. Be - teg ma sa - vo er béd sklê - ri - jenn splann ar peoc'h.  
 2. Ha re - seo péb tre - me - nour euz ka - ran - tez ho torn.  
 3. War an dou - ar skar - ni - let, e ti - wan - (n)o ar feiz.

- Digemerit, o Jezuz, an deiz gand e gened  
 Ho kalon madelezuz a ginnig deom ar béd.  
 Ganeoc'h e tougim gwelloc'h skuizder on labouriou,  
 Ganeoc'h e karim donnoc'h ho pugale wasket,  
 Beteg ma savo er béd sklêrijenn splann ar peoc'h.
- War heñchou an Aviel, e sao an dén kouezet;  
 Tommder ho komzou santel a bare ar c'hleñved.  
 Grit deom frankaad or c'halon da zigemer ar béd,  
 Ha tostaad ouz ar paour-kêz hag an dén disprizet,  
 Ha reseo péb tremenour euz karantez ho torn.
- Ho sklêrijenn a zavo war goulou an naon,  
 He zommder a bareo ar re baour a galon.  
 Ho kroaz a jomo sanket en or buez bepred :  
 Euz ho puez kinniget e tivo an deiz,  
 War an douar skarnilet, e tiwano ar feiz.

## ACCUEILLE, O JESUS

- Accueille, o Jésus, le jour dans sa beauté  
 Ton cœur miséricordieux nous offre le monde  
 Avec Toi, nous porterons mieux la fatigue de nos travaux,  
 Avec Toi nous aimerons mieux tes enfants opprimés,  
 Jusqu'à ce que se lève au monde la belle lumière de la paix.
- Sur les routes de l'Evangile se lève l'homme tombé;  
 La chaleur de tes saintes paroles guérit la maladie.  
 Elargis notre cœur pour accueillir le monde,  
 Et nous faire proches du pauvre et du méprisé,  
 Et recevoir chaque passant de l'amour de ta main.
- Ta lumière se lèvera sur les blessures de la faim,  
 Sa chaleur guérira les pauvres de cœur.  
 Ta croix demeurera toujours plantée en notre vie:  
 De ta vie offerte s'écoulera le jour,  
 Sur la terre desséchée germera la foi.